



**Deskiñ d'An Oadourien**  
Ti ar Vro  
29270 KARAEZ  
Pgz : 02 98 99 94 24  
Plr : 02 98 99 94 57  
dao.breizh@wanadoo.fr

## **Alioù evit implij al levrig embriziañ**

Penaos ober gant al levrig embriziañ ? Lennit mat ar c'hemenoù eus pep barregezh el live kentañ (A1). Kemerit amzer evit prederiañ ha respontit an onestañ ar gwellañ dre lakaat ur groaz bep tro ma soñjit bezañ gouest da seveniñ ar c'hemenn. Meneget eo bep tro an niver a gemenoù a rank bezañ kroaziet evit validañ ar varregezh.

Pa 'peus validet ur varregezh el live A1 e c'hellit ober kement all gant al live uheloc'h, ha kenderc'hel evel-se betek al live na vo ket trawalc'h a groazioù evit validañ anezhañ... pe betek al live C2 !

Ur wech gwiriet ho live e pep barregezh e c'hellit skrivañ an disoc'h e paseporzh ar yezhoù. Evel-se e c'hellit gwelet pelec'h oc'h en em gavet d'ur c'houlz roet e pep hini eus ar 5 barregezh. Anat deoc'h e c'hellit tizhout liveoù disheñvel hervez ma'z oc'h muioc'h en ho pleud dre skrid eget dre gomz, dre selaou eget dre gemer perzh... ha gwelet sklaer evel-se e peseurt barregezh e vefe mat plantañ strivoù.

Evit gwelet hoc'h araokadennoù eo mat adkemer al levrig 2 pe 3 gwech ar bloaz. Ne dalv ket ar boan adkregiñ bep gwech adalek ar penn kentañ vat ! Adsellit ouzh al liveoù n'ho poa ket tizhet ar wech tremen ha klaskit gwelet hag-eñ ho peus validet ul live nevez.

Evidoc'h eo disoc'hoù an embriziadenn-mañ evel-just. Talvoudus e vo ivez ma c'h it d'un aozadur nevez evit deskiñ brezhoneg, pe d'ober ur staj e-kerzh ar bloaz. Gante e vo aezetoc'h d'ar gevredigezh a zegemero ac'hanoc'h da ginnig al live dereatañ ouzhoc'h.

Kalon vat deoc'h !